



DISPUT

ENTRE

SIMON AR GONTEL GAM HA POL AR PRI,

V'AR SUJET AR BUTUN.

S I M O N.

DEIZ-MAD dit, Pol ar Pri, te e va mignon qer;
Eur guell vrud vras a zo ac'hanout er c'hartier.
Clévet e meus lavarat gant eun den eus va zi,
E voas bet o touguen pevar fals-testeni,
Hac evit recompanç eus eur c'hrim qen effroyabl,
Ec'h eus bet un onç Butun: te zo eur miserabl.
Ma na gueres divoal, abars fin ar zizun.
Ec'h erruo ganet suravoalc'h goal fortun:
Crouguet e vi, certain, ma na gueres divoal;
Douguen fals-testeni a zo eur vicher fall.
Nout qet potr coant brémàn; mes ma vez-le crouguet,
Divalooc'h e vez suravoalc'h c'hoas rentet.

P O L.

Goassoc'h a meus-me grêt eguet eul loumbardun
 En em roas d'an diaoul evit cavet Butun,
 Hac a voe en ifern epad mis goengolo
 O servicha Lucifer enpad ma voe eno?

S I M O N.

Onnes zo eur fablen ha ne dê qet güirion :
 N'en em ro den d'an diaoul eus a greiz e galon,
 D'an drouc-speret infam evit cavet netra :
 Ober goab a fell did ; mes did ê ar goassa.

P O L.

Ro peoc'h , mabcagn diot. Ma ves-te Butuner,
 Hirio e man ar yaou ha varc'hoas ar güener,
 E crifes , m'en assur , a nerz da gorsailen :
 Eur paour qez cornedad pe eun tamic chigen !
 Ma vancse did Butun , a ben varc'hoas da nos
 Te a güitaffe crenn da lôd er Barados.

S I M O N.

Va choqi, bras a res , den excumunuguet.
 Pa ven goassa Butuner a voe biscoas er bed,
 Ne gassen qet sönjal er pez a lavares :
 Güell e ve ganén mervel ha caout mil dienes ,
 Ha quittat ar Butun evel eun ampoeson ;
 Ma ve caus din da bec'hi hep nep güir na rêson.

P O L.

Ia, te lavar ze, pa n'en dout get sujet,
 Na custom da vufuna en nep fêçon abet.
 Êzet eo did' cozeal, pa na zantes ar boan
 En deveus eur Butuner hep na Butun, na tan.

S I M O N.

Me a garfe gouzout penos nac en pe fêçon
 Eo deut da guenta ar Butun er viô hac er c'hanton;
 Rac eul louzaouen é zo caus da vil bec'het,
 Ha casimant an oll a vutun dre ar bed:
 An dud yaouanq a fum, peb ozac'h ha peb greg,
 Ha betec a zo gen eun tammic mic'hieg.

P O L.

Ah! pebes graç e roas Doue d'ar gristenien,
 Pa zigassas ar Butun da zoulaji o angen!
 Penevert ar Butun, calz a golje o sqient:
 Bet zo Butunerrien hac a zo brêmàn Sent.

S I M O N.

Gaou a lavares em faç, mab hena Lucifer:
 Biscoas ne zeus bet Sant a vije Butuner;
 Ne gaver get er Scritur nac en histor abet
 E ve eur Zant Butuner hac a voe sovetet.
 Nan, nê get possubl e ve er Barados nicun
 Hac en dese biscoas bet caret ar Butun.

P O L.

Penos, den maleürus ! ha te alfe souten
 Ne voa get Sant Vaze mestr d'ar valtouterien ;
 Hac a voe er Judee e receo an tribut
 Divar ar güin, ar Butun, bemde digant an dud ?

S I M O N.

Me vel ne ouzout get an histor-ze ervat.
 Sant Vaze, p'oe galvet, a chenchas prest a stat ;
 Rac ma vije bepret ehomet da valtoutier,
 E voa bet, hep douetanç, eur prinç da Lucifer.
 Ha c'hoas ne gomzer get eno deus ar Butun,
 Nemet m'er recevet dre an taillou commun.

P O L.

Nê get ret mont, geit-se da glasq an historiou,
 Evit gouzout piou voe en digassas er vrô.
 Frances-daou a hano, Roue demeus a Franç,
 A hanvas da gannad Nicot, den a brudanç,
 Evit lez Bastien, Roue ar Portugal,
 Pipi, evit present, a roas deän ractal
 Butun scaferlati, anduill, cigalennou,
 Butun poultr ha rappet, treujou, carotennou.
 Nicot d'ar Rouanez a roas eur brizen,
 Ma commandças Mari da streffia-dre an daou benn.
 Ha qer stard e streffias, ma zeus bet lavaret
 E siégas he robe, mes n'oan get e velet.

Ne devoa tam yec'het aboc pell bras a voa,
Ha ne rê deus netra an disterra tam joa;
Bea voa attaget gânt ar boan daoulagad.
Goude bea implijet meur a vedecin mad,
Oll e lavarent dêi e colje ar güelet;
Mes Doue a zigassas ar Butun beniguet
Evit he zoulaji hac he renta pare,
Ha calz istre eviti zo bet yac'h goude ze

S I M O N.

Güir ê, peb seurt louzou zo crouet gant Doue,
Hac hini ar Butun en deus eur vertus cre;
En eur remed benac ec'h alle servicha,
Hac avichou ec'h eller certen en implija,
Ha pe ve-hi laget da ober ongantchou,
Eo mad ouz ascorn toret hac ouz ar goulion.

P O L.

Ar Rouanes a Franç ne voa qet gouliet?
Ne devoa bless ebet na nep ascorn toret;
Ne zante poan ebet nemet poan daoulagad,
Ar Butun e yac'heas hac el laqas erlat.
Ouspen ze e zê-mrad eus a bep seurt clévet:
Chasseal ra ar c'hatâr ha scanvat ar seperet,
Hac ouz ar velanconi e soulâch ive au den
En dese eur boan benac, eur spont, pe eun angen.
Anfin, neus forc pe z clévet a deu d'hon attaqi,
Ar Butun, dreist peb tra, a deu d'hor soulaji.

S I M O N.

Ya choqi brañ a res, den excumunuguet;
 Lavarat e teu ar Butun da scânvât ar speret;
 Er c'hontrol ê : troublet e ve dre nerz ar Butun,
 Mesqet ha barbouillet evel glao ha curu.

P O L.

Brassoc'h gaou a lavares, Doue-d'am pardonno;
 Neus qet a dud santel na savant ebars ar vrô
 Na implijont Butun pe en corn pe en fri:
 Eus a oll dud ar bed, a bemp e vutun tri;
 Ha c'hoas e lavaràn gaou ouспен eus an anter,
 Rac ma ve grêt eur roll partout dre ar c'hartier,
 Ar vèleyen da guenta a vutun oll cazi,
 Ma ne laqont en corn e laqont en o fri,
 Hac a zo tud santel savet en doctrin vat:
 Ma vije ta eur pec'het, e teujent d'er c'huittât.

S I M O N.

Ar vèleyen a fazi qercoulz hac ar re all;
 Ne lavaràn qet evit se certen e zint tud falt,
 Rac ar re-ze a zo tud fur, habil ha moderet,
 Qercoulz gant ar Butun evel gant traou ar bed,
 Nonpas te ha da seurt zo evel diaoulou,
 Nemet ar c'horn a ve bepret en da c'hinou.
 Te voerze da vragou evit prena Butun,
 Hac enpad ma fumes, da dud a zo o yun.

Da vreg, da vugale a varv gant an defot.
 Eur vech evit caout Butun te voerzas da ribot,
 Er rojout evit tri goennec, hac hi o coustout deg,
 Tri goef ha tri mouchouer hac un invis da creg,
 Ar pez a zo caus dêi da rêi did mil mallos,
 Ha da c'honit an isern ellec'h ar Baradôs;
 Ha c'hoas te e goaldrêtas gant froad eur gos rastel,
 En defot ne voerze he brôs' hac he mantel.

P O L.

Ia, hi a lavar ze; mes se a zo eur gaou,
 Ha brassoc'h eguet se a deu deus he guinaou,
 Rac pa ve en coler e zêo evel eur serpent,
 Hac e lavar din mil injur, traou vil hac insolant.
 Ha ma else bea mestrez' var va braguezen,
 E rafe din, me gred, douguen he goleden.

S I M O N.

Commanç dre vea fur, den brao ha moderet,
 Ha quitta ar Butun evel eun drouc-speret.
 Da vreg zo coant ha fur, hac eur boannierez vat,
 Mes te zo eur bourreo, eun tirant, eun ingrat,
 A deu d'he goaldrêti, pa vanq dide Butun,
 Hac e lêzes anêi ha da vugale da yun.

P O L.

Penos quittat ar Butun, Simon an Diboellet?
 Güeh ye ganén mervel ha bea dibarfoeltret;

Rac o tont da vervel n'em be nemet eur boan ,
 Hac o vea hep Butun n'on get quit gant unan.

S I M O N .

Brémàn e credàn ferm ar pez a meus dennet
 En eur fablen goechal , pa voan gant va dênved ,
 Penos voe ar Butun a voe caus da Gaïn
 Da goea en disesper ha da ober goal fin ;
 Rac Caïn voa ar c'henta a labouras an douar .
 N'ouzòn get pe gant tranch pe bal , den n'en lavar .
 P'en devoe labouret ha destumet al louzou ,
 Ha laqet gantàn oll ar re fall a verniou ,
 Evit dont d'o dêvi eno var an dachen ,
 Ha teuler al ludu en creiz hac en daou benn ,
 Louzaouen ar Butun en em gavas ive
 Etoues al louzou all. Caïn ne vouie doare ,
 Qen a zantas ar c'hoez dioutàn o têvi .
 Hac antren aneàn ar mogued en e fri ;
 Ma commanças streffia evel eun den counnaret ,
 Ha da gonsideri petra e voa ar sujet.

Qerqent hac én fouilla , ma cavas eun tam had
 Ne voa get c'hoas dêvet , hac en hanvas TABAC.

Calz a dud a sònch dê Tabac a zo gallec ,
 Mes en em drompla a reont , rac certen n'en dê get .
 Tabac zo eur guer hebre , a sinifi bocen ,
 Pestilanc , drong-ar-c'hi , calz a draou all ouspen .
 Louzaouen anjin fall a hanver anei c'hoas ,

Qement e; zêo noazus d'ar re bian ha bras,
 Da viana, Caïn a vœ ganti goal droublet,
 Pa antreas en e benn an nerz eus ar moguet.
 Eun nebeud goude ze ec'h erruas Abel,
 Breur unic da Gaïn, eun den fur ha santel,
 A c'houlennas outañ. — « Va breur, petra c'hens grêt,
 Ma zê da zantimant ha da speret troublet? »

« — Irvin daonet, me Caïn, teç'h prest dirac va faç,
 Pe me a barfoueltro hac a tolo d'am chass. »

Abel vœ ger spontet, ma coeas d'an douar;
 Caïn, evel eur c'hi clânvêt gant ar gounnar,
 A zaillas var e vreur hac en lazas timat;
 A laqas an douar da rusia gant ar goad.
 Cetu genta massacr a voa bet erruet,
 Divarben ar Butun, louzaouen milliguet;
 C'hoas ne voa qet avoalc'h, rac Caïn goude ze,
 Pa vœ bet tamallet, gourdrouzet gant Done;
 Pa velas pebes muntr ha crim en devoa grêt,
 A goeas en dizesper hac a zo bet daonet.
 Oh diaoulou an ifern, pa vœ daonet Caïn;
 En em gavas gantàn pa voat ouz en enterri.
 Mar er c'hasjont gante var eur mène huel,
 Hac e laqjont e gorf da zec'ha en avel.
 Pa vœ neuze sec'het ha crazet a fêçon,
 En e gargjont qerqent demeus a bouliñ canon;
 Hac entouez ar poultr-se e sourjont pacajou

Allumettez chimiq, coton-poultr a zac'hadou.
 An traou-ze oll en e vemprou fouret,
 A dleye, a dra sur, ober calz a effet.
 Neuze e rejont eun toull ebars en e goste,
 Da zervichont da amors er c'horf milliguet-se;
 Laqat an tan varnean evel var eur c'hanon,
 Ma foueltrjont bibennadou ebars en peb canton.
 Ha neuze gant eur paqad a Vutun infernal
 Unan a yas er Spagn eun all er Portugal;
 Unan a yas en Brô-Soz, eun all en Itali,
 En Allamagn, en Holand, er Suiss hac en Turki;
 Mes al loden vrassa a voe strinqet en Franç,
 Dreist-oll en Breiz-Izel, d'hon daoni en avanç.
 Var paluden Maran, er guêr a Vontroulez,
 E coezas eul loden, n'en dêo qet eur soûez,
 Rac sônch a voa dija (eus a ze e zoar sur)
 E vije er plaç-se grêt eur manufactur.
 Stlappet e voe ive ebars en Normandi,
 Er Chin, en Tartari, er Pologn, er Russi;
 Anfin, strinqet e voe dre bêvar c'horn ar bed;
 Er fêçon-ze ar Butun zo en em c'hriennet
 Dre an oll brovinçou, dre voyen Belzebut
 Ha Caïn milliguet, evit peur-goll an dud.
 Ha te, evel Caïn, a velân a zo prest
 Da goea en disesper ha da c'hoari da rest.
 Sepet ma po Butun, ne res tam câs ebet
 P'en devo naon da dud, pe o devo sec'het.

Eur bassiantet vras a meus eus da glêzet :
 Ma sentjen d'am humor m'em boa da barfoueltret ;
 Mes güelet a ràn sclêr n'out nemet eun azen ,
 Ha te grêt da studi, ne ouzout get ouspen.
 Da argumant zo fos, n'en dout get fontet mad,
 Particulieramant var ar guer a Dabac.
 Te lavar ê hebre, me lavar n'en dê get ;
 Me a ya d'er zouten dre'r pez a meus lennet.

Pa voa goechal ar bed abimet en antier
 Gant doureyer an diluch, certen e voa mizer ;
 Noe a ras eun arc'h dre ordrenanç 'Doue,
 Evit en em gonserv, ên hac e vugale.
 Pa voe bet er guis-se eur pennad var an dour,
 E leusgas eur vran du, darn a lavar eur scour,
 Evit gouzout hac hi a gavje tam douar dizolo,
 Pe eur mene benac en eun tu var an dro ;
 Ar vran a eure goab eus Noe ar barvec,
 Hac a chommas da zêbri qig tud ha qig loened.
 Mes Noe pa velas ne deue get var e guis,
 A leusgas var e lerc'h eun eil güech eur vran gris ;
 Pehini a retornas, ar goulmic beniguet,
 Hac eun deillen Butun ganti en creiz he beg.
 Neuze en devoe joa ar Barveg côs Noe,
 Hac ên ober eur zeron eno d'e vugale,
 Var sujet ar Butun, ha rêzon en devoa ;

Milliguet vo an den a ray ar memes tra.
 Neuze Noe ractal hac en henvel TABAC,
 Nonpas en ies hebre, mes en ies syriac;
 Ha pa ve expliqet en langach brezonec,
 E sinifi qêlou mad, boneur bras hep abec.
 Neuze Noe a deuas da lavarât d'e vugale :

« Ho-pet soign, emezàn, eus. al louzaouen-ze,
 » Rac onnes zo eul louzaouen ha ma òuse an oll,
 » A ro calz a brofit, hac a vir ouz ar c'holl.
 » Da guenta e zêo mad evit en em gonsoli
 » Diouz maliç ar grague, pa vent en o furri.
 » Laqit eur c'hornedad, sortiit prontamant
 » Ermes demeus an ty evèl rac eur ser pant,
 » Ha lavarit en latin eur gueric mad benac:
 » *Libera nos, Domine.* Hon delivrit, Autrou mad.
 » *A fulguræ et tempestate.* Ha lavarit goude ze :
 » Diouz ar foeltr, an tempest, hor mirit, va Doue,
 » Ha laqit eur c'hornedad var ho paciantet,
 » Ha souden e sortio ar goler diouz ho creg. »
 Brêmàn, Simon, e leal, ha te ouffe contesti
 Na disput ouzîn-me, daoust d'ac'h oll studi?

S I M O N.

Contesti rafen ouzit, ma vez den rêsonabl;
 Mes eun den daonet out, se zo incontestabl.

P O L.

Da fri en traòn va c'hein, Simon ar Gontel-Gam.

S I M O N.

Ha te yêl gant an diaoul, Pol ar Pri, den infam:

P O L.

Mar car rêi din Butun, m'er servicho sincer.

S I M O N.

Mont avoalc'h a ri gantân hep Butun na diner.

P O L.

Lavarat a rân did c'hoas : sepet em ho Butun,
Ne sônjan nac en isern, na memes er gurun:
Butun! Butun atao! hep diner na çantim....

S I M O N.

Adieu, fri capottet : coll a res va estim.

F I N.